



## G U E R Z

*Composet a nevez var sujet ur maleur êruet  
en Naonet, er bloa 1822.*

---

### Var un ton nevez,

DERET-SANTEL adorabl, disqennit eus an en  
rêi din guir sclêrijen ma c'hallin ep dale  
elêria un drabison a nevez êruet,  
lavez daou varnuguent, en bord qêr an Naonet.

Gant mab un Negociant demeus a galite,  
êret e dud digantân ho daou e pemzec de;  
his en bet heritour da vadou an dud-mân,  
dezân e voant dleet, pa ne voa nemetân.

Ar c'haera Negociant demeus a goste qêr,  
vo an den yaouanq-mân passe milioner,  
den fur, un den vaillant ha disqet ar c'haëra,

Hac an ol habitantet 'a istim anezàn.

P'oe bet c'hoec'h sizun amzer ebar en e diez,  
O jouissa e vadou en e blijadurez,  
E zint bet en em glêvet an Negociantet,  
Evit clasq ar voyenou ma vije trahisset.

En em adressi rejont da eur mignon dezàn,  
Evit monet e vede, ha sevel d'e bea,  
Eur som terrubl a arc'hant convenet entreze,  
Pepini e anter-cant scoet, daouzec voa aneze.

Mar galje ober dezàn placi e ol vadou,  
Hac e ol varc'hadourez ebars en ho mescou,  
Hac e voant contant da rei mercou a assuranc,  
Ha mar graje qementse e zê d'en em avanç.

Monet a ra an den-màn da gaout e vouir vignot,  
Evit comañç labourat var an tol trahison,  
Ha gonezet e galon gant an avarisdet,  
O c'hessa gonit ar som voa dezàn prometet.

An den-ma en diguemer gant cals a joaustet,  
Ous en pedi da dremen ous tol da zebri boëd :  
En, ous en trugarecât, a lavaras dezàn,  
En deoa c'hoant hac ezom er bras da gomz outàn.

En eum retina rejont en eur gampr a goste,  
En lec'h ma oa impossubl da zen cêlvet ane,  
Qent ma teuas digantàn e lacas en e benn,

Frezàn tout e dieguez ha plassa e voyen.

Te a so un den yaouanq, sent ouzin, va mignon,  
Ha plaç da varc'hadourez entoez tud a fêçon,  
Ha qemer eur bansion evit beva êzet,  
Rac nemet da revina ne ra domestiqet.

En eur ober pemzec de en deus distribuet  
E ol vadou en antier entoez e vignonet,  
Ha goude e c'hespere beva en plijadur,  
Qent finissa e cleffet disclery e avantur.

Daou viz ha seitec devez goude m'en deus placet  
E ol vadou en antier etreze o daouzec  
E zint bet en em gêvet da guerc'hat anezàn,  
Da vont d'an hostaliri assambles da goania.

Selzouit ar finessa o deveus invantet  
An daouzec den maleurus abeurs an droug-speret  
O defoa eur guistion da diwarn entreze,  
Hac e oa calz capaploc'h da ober evite.

Grêt o deveus eur repas eus ar c'haera meuziom  
Ha qemeret da eva ar guella liqueuriou :  
Gout a ouient e voant sur da ober o zorfet,  
Na rent fors evit dispign bete ma vije grêt.

Ebars er fin ar repas e leverjont dezàn,  
Qent m'an eum dispartijent e teuje da sina  
Na glefoant netra dezàn goude rei e ol vad ;

Tlsta situation ha goassa calonat !

An den-mâ, leun a zouçder a respont aneze,  
 Gant calz a baciantet hac a humilite,  
 Just e ve din, emean, va brassa mignonet,  
 Donet da obeissa d'ar pezh a gomandet.

Petra dalfe da un den donet da resista  
 Oc'h e vestr? ne rai biqen; rancout a rae plega,  
 Preparit din eur c'hornet, eur bluen ha paper,  
 Ha me a rai qementse ebars en ho faveur.

Evel m'en devoa scrivet ar lignou var paper,  
 Unah a grogas ennân, en plant en e c'hodel,  
 Pêvar a grog en den-mân d'en lacat var eur banc,  
 Ha donet d'en dioada en eur memes instant.

Evel m'o deus en lazet o deus-en entêret,  
 An daouzec den maleurus gant satan goneet,  
 Ebars en creis ar jardin, dindan eur bod lore,  
 En lec'h ma zeo bet cavet un neubeut goude-ze.

Eur botrezic oa en ti deus a eiz bloa oajet  
 A voa laqet en ur gampr a uz de da gousqet,  
 Dre bermission Doue a zeu da zivuni  
 Ha disqen en o mesqo o clêvet an dourni.

Pa veler goad o redec e zeo bet estonet,  
 Ha ma zez en eur goele adreg o c'hein da guset,  
 Ac'hane e deus goelet e ol goad e sailla,

Ha pêvar den maleurus o terc'hel ancâ.

Pa finissas o zorfet hac o entêramant,  
E sortijont ac'hane en eur memes instant,  
Dan ti da ober o c'hont ha da bêa ar pred,  
Ha da eva eur bannac'h gent bea separet.

Caër o deus clasq o buguel goude ma oant savet,  
Da seiz heur eus ar mintin e zeo aparisset;  
Pa vel au eol o para ec'h antreas en ti,  
Da c'houlen eun tam bara evit he dijuni.

Mont a ra an hostises ha cregui er gontel,  
En avis trêc'hi bara evit rei d'he buguel,  
Holla! va mam, emezi, lest onnes a goste,  
Ha troc'hit din gant un al, balamour da Zoue.

Rac honnes eo ar gontel so bet o tivoada  
An otrou yaouanq a voa dec'h da noz o coania  
Gant e ol gompagnonet aze er gabinet:  
Sur on eo guir qementmâ, rac me a meus guelet.

Leiz au ti a dud a voa e clêvet ar buguel  
O tonet da zisclêia un torfet qer cruel;  
Dre ar boez eus e langach e zint bet sortiet  
Ermes en hostaliri, hac int ol estonet.

Evel ma voa sortiet an dud-mâ ac'hane,  
An hostis, an hostises en em glêvas goude,  
Ma hejont da gaout unan eus an dorfetourien,

Hac en deus o c'honseillet da ober evellen.

Oc'h entent o rêsoniou, en devezs prometet  
 E raje sevel deze etreze pem cant scoet  
 Evit laza o buguel, he laqat en douar,  
 Pe e rai hor punissa, emê an den barbar.

Qementse o deus cresqet o spont hac o estou.  
 Retorn a reont d'ar gêr ha mantret o c'halon;  
 Epad an noz ep repos, o speret en combat,  
 Mes, a drugare Droue, e c'hone o Æl-mad.

Ozac'h ha greg an ti-màn pini ma voa placet  
 An den-mâ en pansion, en deus intêrojet  
 Ar gompagnunes pini a voa bet evintàn  
 An avis clêvet ganti ar c'hêlou anezàn.

Hac o devezs respontet penos voa sortiet  
 Demeus ar gampr digante ebars e fin ar pred;  
 Abaoue, e nep fêçon, n'oant qet vit lavaret  
 Petore hent a vouije da vea qemeret.

Ac'hane int retornet bete'n hostaliri,  
 Da intêroji he zud, pêvar jandarm hac hi,  
 Dre ma leveret deze voant carguet anezàn,  
 Hac en beo pe en maro e rancjent e renta.

Manq oc'h eus, me ar jandarm, hac ho pried ha  
 c'houi,  
 Mar gouzoc'h ar viilone ha tevel varuezî;

Ni hon eus urz da c'hoesa an tân bars en ti-màn,  
Hac e velfot o têvi qement mad so ennàn.

N'oufemp petra da ober, hac e vemp condaonet  
Da receo ar supliçou ponnerra a garfet,  
Ne oufemp qet birviqen donet da zecidàn  
Pelêc'h e ve êt un den n'ouzomp doare dezàn.

Ar buguel en em gavas hac en deus goulennet:  
Leveret din, otrone, piou an ini a glasqet:  
An trou yaouanq voa amâ dec'h da noz o coania,  
Ha na glêvomp enablêc'h ar c'hêlou aneàn.

Eo, ganén, me ar buguel, e clêfot e guêlou:  
An den-se a so maro, Doue d'er pardono.  
Me zisqueuzo dêc'h aze el lêc'h meo bet lazet,  
Ouspen e hanvin dirazoc'h ar re en deveus grêt.

Ar jandarim pa he c'hlêvas, a dennas e gayer,  
Hac a gomanç da scriva testeni ar buguel  
Hac o tont d'he fresanti, en deveus estonet  
Ar barner, ar senechal, hac e accessoret.

Qemeret voe an dud-màn, ha neuze prisoniet,  
Houarnet ha garotet en guis criminalet,  
Ha presantet diraze testeni ar buguel  
Ma leverent en ur voëz: ret e vezo mervel.

Entre ma pad o madou, eo padet o froces  
Evit ober pinijen eus o falagries,

te en difin o voyen e zint bet condaonet  
t soufri ar marô, p'o devoa metitet.

ma drivet a vis ebrel, er bla daou varnuguent,  
êruet qement-mân, evit tel da entent,  
ac en dri a voengolo int bet guillotinet,  
memes heur o daouzec e creis qêr a Naonet.

ment-ma, asistantet, n'e dint qet fablennou,  
istor-mâ so tennet divar ar c'héloyou  
den o clêvet o lenn, en deves o rimet,  
it dont d'e fablia etouez ar vretonet.

Gouleanomp digant Doue, goude fin her bue,  
Ar c'hrac da n'em anaout en jesüstet ar ên :  
Pedomp Doue e vite, ma viont recevet  
Gant Jesus hac ar Verc'hes en pales an Drindet,

**F. I N.**

---

E Montroulez, eus a Imprimeri LÉDAN.